

ESPACE
LEURENN

GLEN MOR

CARHAIX
SAISON CULTURELLE
OCTOBRE > DÉCEMBRE 2020

KARAEZ
KOULZAD SEVENADUREL
HERE > KERZU 2020



ACCUEIL PUBLIC DEGEMER AN ARVESTERIEN

En application des recommandations sanitaires visant à lutter contre la propagation de l'épidémie de Coronavirus sur le territoire, de nouvelles modalités d'accueil du public s'appliquent à l'Espace Glenmor :

- L'accès à l'Espace Glenmor est réservé exclusivement aux personnes munies d'un masque (à l'exception des enfants de moins de 11 ans). Le port du masque est obligatoire dans l'ensemble de l'établissement.
- Il n'est pas nécessaire de laisser de places vacantes entre chaque spectateur dans la salle de spectacle. Merci néanmoins lors de vos déplacements de respecter une distanciation physique d'1m entre chaque personne.
- Merci de respecter le sens de circulation matérialisé à travers un marquage au sol, afin d'éviter le croisement des personnes.

Afin de vous accueillir dans de parfaites conditions de sécurité sanitaire :

- Nos locaux sont nettoyés et désinfectés de façon approfondie une fois par jour.
- Les surfaces de contact (poignées de porte, rampes d'escalier, boutons d'ascenseur, robinets d'eau des toilettes) sont nettoyées entre chaque séance.
- Nos locaux sont systématiquement aérés entre 2 représentations.
- Notre comptoir d'accueil est équipé d'une plaque de plexiglass.
- Des solutions hydro alcooliques sont à votre disposition dans nos halls d'accueil.

Ces modalités d'accueil sont susceptibles d'être modifiées en fonction des recommandations gouvernementales et de l'évolution de la situation sanitaire. Nous vous tiendrons informé(e)s à travers la mise à jour régulière de notre site internet (www.glenmor.bzh), que nous vous invitons à consulter en amont de votre venue.

Evit lakaat an erbedadennoù yec'hedel da dalvezout evit stourm ouzh emled epidemiezh ar c'horonavirus er vro e vez lakaet doareoù nevez da dalvezout evit degemer an arvesterien el Leurenn Glenmor :

- Ne c'hall mont e-barzh al Leurenn Glenmor nemet an dud a wisk ur maskl (war-bouez ar vugale dindan 11 vloaz). Gwiskañ maskloù zo ret e-barzh al Leurenn Glenmor a-bezh.
- N'eo ket ret lezel plasoù vak etre pep arvester er sal-abadennoù. Doujit, mar plij, d'an hed 1 m etre pep den, koulskoude, pa vezit o'n em ziblasañ.
- Doujit, mar plij, d'an tu tremen a zo lakaet war wel war al leur, kuit d'an dud d'en em groaziañ.

Evit degemer ac'hanoc'h gant an aozioù surentez gwellañ a-fet yec'hed :

- Naetaet ha digontammet e vez hor salioù en un doare pizh ur wech an deiz.
- Ar gorreennoù a vez touchet gant an dud (dornelloù, harzelloù diri, boutonoù ar pignerezioù, ar c'hogoù er privezioù) a vez naetaet etre pep abadenn.
- Avellet e vez hor salioù bep taol etre 2 abadenn.
- Ur blakenn bleksiglas zo ouzh hor c'hontouer degemer.
- Izili hor skipailh a wisk maskloù.
- Dileizhennoù hidroalkoolek a c'hallit ober ganto en hon halloù degemer.

Gallout a ra an doareoù degemer cheñch hervez erbedadennoù ar gouarnamant ha hervez emroadur an enkadenn yec'hedel. Kelaouiñ a raimp ac'hanoc'h dre hizivaat ingal hol lec'hienn Genrouedad (www.glenmor.bzh), a bedomp ac'hanoc'h da sellet outi a-raok dont.

VENDREDI 2 OCTOBRE
ENSEMBLE MATHEUS :
L'OLIMPIADE

DIRECTION :
JEAN CHRISTOPHE SPINOSI
 20H30
 AMPHI


OPÉRA, MUSIQUES CLASSIQUES

Jean-Christophe Spinosi renoue avec Vivaldi ! Créé à Venise en 1734, L'Olimpiade, illustre les tribulations amoureuses d'Aristea, fille du roi Sicyone, promise par son père au vainqueur des Jeux Olympiques. S'inspirant de l'écriture musicale particulièrement riche de cette pièce et de l'intrigue à rebondissements qui y est dépeinte, l'Ensemble Matheus propose une version inédite, mêlant plusieurs disciplines. Sur scène, les musiciens, dirigés par Jean-Christophe Spinosi, seront entourés de trois chanteurs lyriques, et d'un comédien-metteur en scène de la Comédie Française.

L'Ensemble Matheus est subventionné par le Conseil régional de Bretagne, le Conseil départemental du Finistère, la Ville de Brest, le Ministère de la Culture et de la Communication - DRAC de Bretagne. Les activités de l'Ensemble Matheus sont soutenues par le Fonds de dotation BNP Paribas - Banque de Bretagne. Air France est le partenaire officiel de l'Ensemble Matheus.

TE : 10 € / TA : 15 € / TR : 17 € / TP : 20 €

www.ensemble-matheus.fr



© E. Spino

GWENER 2 VIZ HERE
LAZ-SENIÑ MATHEUS :
AN OLIMPIADA
RENEREZH :
JEAN CHRISTOPHE SPINOSI

8E30
 ANFI

OPERA, SONEREZH KLASSEL

Lakaat a ra Jean-Christophe Spinosi Vivaldi da dregerniñ a-nevez ! Taolenniñ a ra « La Olimpiada », krouet e Venezia e 1734, trubuilhoù karantez Aristea, merc'h ar roue Sikyon, prometet gant he zad d'an den a c'hounezo ar C'hoarioù Olimpek. Awenet gant skritur pinvidik-tre ar pezh-se ha gant an itrikoù leun a cheñchamantoù dic'hortoz e kinnig laz-seniñ Matheus un abadenn nevez-flamm, meur a ziskiblezh mesket enni. Kinnig a ra al laz-seniñ Matheus, awenet gant an doareoù puilh-kenañ a voe skrivet sonerezh ar pezh-se hag an itrikoù leun a cheñchamantoù dic'hortoz a zo deskrivet ennañ, un abadenn nevez-flamm, a vesk meur a ziskiblezh. Ar pemzek soner renet gant Jean-Christophe Spinosi a vo war al leurenn a vo ganto tri c'haner lourennek, hag ur c'homedian-leurenner eus ar C'homédie-Française.

Sikouret eo al Laz-seniñ Matheus gant Kuzul-rannvro Breizh, Kuzul-departamant Penn-ar-Bed, Kêr Vrest, Ministrerezh ar sevenadur hag ar c'hehentiñ - RRAS Breizh. Sikouret eo obererezhioù al Laz-seniñ Matheus gant ar Font debarzhañ BNP Paribas - Bank Breizh. Air France zo keveler ofisiel al Laz-seniñ Matheus.

PB : 10 € / PK : 15 € / PD : 17 € / PL : 20 €

DIMANCHE 4 OCTOBRE

KANEVEDENN

LA QUINCAILLE

15H00

AMPHI

THÉÂTRE, CHANT EN BRETON POUR TOUS

Ruz (toujours un peu râleuse...), Glas (et son blues éternel...) et Melen (fille du soleil radieux...) vivent dans leur chant émotionnel. Nos trois personnages apprennent à doser leur curseur pour être compatibles et découvrent soudainement d'autres teintes complémentaires !

Une petite goutte de Glas, une tache de Ruz, un zeste de Melen, et tout s'éclaire. Sans oublier Gwen et Du, qui ont aussi leur part de mystère...

Vous ne parlez pas breton ? Où est le problème ? Les sourires et les grimaces sont universelles ! Alors les enfants, sortez vos parents, direction : l'arc en ciel...

À travers ce spectacle plongez dans un univers ludique, rond et cocon, tout en couleur, déployez la palette du monde émotionnel, et faites chanter la colère, la tristesse, la joie !

Écriture & jeu : Marion Gwen, Maud Anelli, Katell Kloareg, Séverine Valomet
Musique : Fred Boudineau
Construction : Denis Colin
Costumes : Marion Laurans
Regards extérieurs : Thomas Cloarec
Mise en son : Ewen Briant

Dès 3 ans.

Durée : 45 min.

Coréalisation Espace Glenmor, Échanges & Cie.

Ce spectacle n'est pas inclus dans notre formule d'abonnement.

TU: 1 €

BILLETTERIE EN VENTE SUR PLACE UNIQUEMENT



© E. Laper

www.laquincaille.com

SUL 4 A VIZ HERE

KANEVEDENN

LA QUINCAILLE

3E00

ANFI

C'HOARIVA, KAN BREZHONEK EVIT AN HOLL

Ruz (ur plac'h hag a vez bepred o soc'horal un tammig...), Glas (hag he blues peurbadel) ha Melen (plac'h an heol) zo o vevañ en o c'han fromel. Deskiñ a ra hon teir zudenn en em vestroniañ evit en em glevet mat ha kavout a reont livioù klokaüs all a-daol-trumm ! Un dakennig eus Glas, un tarch eus Ruz, un disterañ eus Melen, ha pep tra a zeu da vezañ sklaer. Anez disoñjal Gwenn ha Du, a zo ul lodenn gevrinus enno ivez.

Ne gomzit ket brezhonek ? Pelec'h emañ an dalc'h ? Traoù hollvedel eo ar mousc'hoarzhoù hag an ardoù ! Neuze, bugale, lakait ho tud da vont er-maez, ha da vont war-zu : ar ganevedenn...

Gant an abadenn-se, splujit en ur bed c'hoariüs, didro ha gwarezus, e liv, displegit holl livioù bed ar fromoù, ha lakait ar vuanegezh, an dristidigezh, al levenez da ganañ !

Skrivañ & c'hoari : Marion Gwen, Maud Anelli, Katell Kloareg, Séverine Valomet
Sonerezh : Fred Boudineau
Sevel : Denis Colin
Gwiskamantoù : Marion Laurans
Selloù diavaez : Thomas Kloareg
Son : Ewen Briant

Adalek 3 bloaz.

Pad : 45 min.

Kensevenet gant al Leurenn Glenmor, Échanges & Cie.

N'emañ ket an arvest-se e-barzh hor formulenn goumanantif.

PH: 1 €

BILHEDOÙ E GWERZH WAR AL LEC'H HEPKEN

SAMEDI 10 OCTOBRE NUIT DU GLAZ

20H30
AMPHI

MUSIQUES TRADITIONNELLES

La musique bretonne est bien vivante ! Le bagad Karaez organise la 6^e édition de la Nuit du Glaz et vous propose un voyage musical le temps d'une soirée concert. Au programme le Bagad Karaez, Pêr Vari Kervarec & Fañch Le Goff, Digabestr, ainsi que d'autres surprises !

Organisation : Bagad Karaez, en partenariat avec la ville de Carhaix et l'Espace Glenmor.
Ce spectacle n'est pas inclus dans notre formule d'abonnement.

8



GRATUIT

www.bagadkaraez.bzh

SADORN 10 A VIZ HERE NOZVEZH AR GLAZ

8E30
AÑFI

SONEREZH HENGOUNEL

Bev-birvidik eo sonerezh Breizh ! Bagad Karaez a aoz 6^{vet} Nozvezh ar Glaz ha kinnig a ra deoc'h ur veaj sonerezh amzer ur nozvezh sonadeg. War ar roll : Bagad Karaez, Pêr Vari Kervarc'heg ha Fañch ar Gov, Digabestr, hag ivez souezhadennoù all !

Aozet gant : Bagad Karaez, e kenlabour gant Kêr Garaez hag al Leurenn Glenmor.
N'emañ ket an arvest-se e-barzh hor formulenn goumanantiñ.

DIGOUST

VENDREDI 16 OCTOBRE
GARDEL Y YO,
UNE VIE DE TANGO
CAROL DELGADO,
DAMIEN JOËTS

20H30
 AMPHI

THÉÂTRE MUSICAL

Carlos Gardel est une légende du Tango, qui est née à Toulouse, a traversé l'Atlantique, les quartiers populaires, et les bordels de Buenos Aires pour gagner les salons des nouveaux riches de toute l'Amérique Latine, puis les casinos et les grandes salles des capitales nord-américaines ou européennes. Berthe Gardes, sa maman, qu'il n'a jamais quittée, parle de lui. Et, comme elle n'a pas la langue dans sa poche, elle vide son sac. La légende en prend un coup. En une heure, elle raconte les humiliations qui l'ont obligée à fuir la France pour le Nouveau monde. Sous le piano du bordel, Carlitos a vite compris que le peuple de l'exil avait besoin que quelqu'un chante la nostalgie des pays et des femmes perdues, les rêves brisés. A partir d'une mise en scène contemporaine, la comédienne, et chanteuse, Carol Delgado, nous fait revivre le mythe de toute une époque, dont les vraies héroïnes sont les femmes.

Texte : Ricardo Montserrat
 Jeu et chant : Carol Delgado
 Direction et mise en scène : Pierre-Marie Quesseveur
 Regard extérieur : Barbarie Crespin, Patricia Lecordier

Dès 7 ans
 Durée : 1h15

10



GWENER 16 A VIZ HERE
GARDEL Y YO,
UNE VIE DE TANGO
CAROL DELGADO,
DAMIEN JOËTS

8E30
 AÑFI

C'HOARIVA SONEREZH

Carlos Gardel zo un den brudet e bed an Tango ; ganet eo bet e Tolosa ha treizhet en deus ar mor Atlantel, ar c'harterioù poblek, hag ar fouzlec'hoù e Buenos Aires evit mont da saloñsoù ar binvidien nevez en Amerika latin a-bezh, ha goude-se d'ar c'hazinoù hag d'ar salioù bras er c'hêrioù-penn e Norzh Amerika pe en Europa. Berthe Gardes, e vamm, n'eo ket bet dilezet gantañ gwech ebet, a gomz diwar e benn. Hag evel ma n'eus ket a yod stag ouzh he zeod e tisaç'h he c'haoz. Diaes e vez lakaet ar vojenn. E-pad un eurvezh e kont ar mezhekadennoù o deus lakaet anezhi da dec'hel kuit diouzh Frañs evit mont d'ar Bed nevez. Pa veze Carlitos dindan ar piano en doa komprenet buan en doa ezhomm pobl an harluañ e kanfe unan bennak hiraezh ar broioù hag ar merc'hed kollet, an hunvreoù frailhet. Gant un doare leurenniñ a vremañ e laka Carol Delgado ac'hanomp da advefañ istor kaer ur mare a-bezh, ma oa ar maouezed an harozezed gwirion.

Testenn : Ricardo Montserrat
 C'hoari ha kan : Carol Delgado
 Renerezh ha leurenniñ : Pierre-Marie Quesseveur
 Selloù diavaez : Barbarie Crespin, Patricia Lecordier

Adalek 7 vloaz
 Pad : 1e15

TS : 5 € / TE : 5 € / TA : 8 € / TR : 10 € / TP : 13 €

TS : 5 € / PB : 5 € / PK : 8 € / PD : 10 € / PL : 13 €

SAMEDI 24 & DIMANCHE 25 OCTOBRE 31^E FESTIVAL DU LIVRE EN BRETAGNE

10H00-19H00
ESPACE GLENMOR

Rendez-vous incontournable et véritable vitrine de l'édition en Bretagne, le festival du livre se déroule chaque année à Carhaix fin octobre. La manifestation accueille la grande majorité des maisons d'édition de Bretagne, plus de 300 auteurs, fidèles à ce rendez-vous. « La poésie bretonne dans tous ses états... » : le thème de cette 31^e édition ne manquera pas de souligner l'apport incontestable de la Bretagne à l'œuvre universelle poétique à travers sa propre sensibilité. Des conférences thématiques ponctueront le festival ainsi que les remise des prix du roman de la ville de Carhaix, priz danevelloù Ti-kêr Karaez et Priz Langleiz.

Organisation : Centre culturel breton Egin.



GRATUIT

DIGOUST

SADORN 24 & SUL 25 A VIZ HERE 31^{VE} GOUEL AL LEVRIOÙ E BREIZH

10E00-7E00
LEURENN GLENMOR

Un emgav ha na c'haller ket c'hwitañ warnañ eo Gouel al levrioù, al lec'h diskouez gwellañ evit an embann e Breizh anezhañ. Dalc'het e vez bep bloaz e Karaez e dibenn-sizhun diwezhañ miz Here. En abaden-se e vez degemeret ar braz eus an tiez-embann e Breizh hag ouzhpenn 300 skrivagner, feal a zeu d'an emgav. « Ar varzhoniezh vreizhek en he holl zoareoù... » : ne vanko ket tem an 31^{vet} dalc'h-se da lakaat war wel petra a vez degaset gant Breizh d'an oberenn hollvedel varzhhek dre he c'hizidigezh dezhi. Prezegenoù tematek a vo e-pad ar festival hag abadennoù ma vo roet priz ar romant gant Kêr Garaez, priz danevelloù Ti-kêr Karaez ha Priz Langleiz.

Aozet gant : Kreizenn sevenadurel vreizhek Egin.

www.festivaldulivre-carhaix.bzh
festivaldulivre@gmail.com

SAMEDI 31 & DIMANCHE 1^{ER} NOVEMBRE BIOLOJIK KARAEZ

10H00-19H00
SALLE J. MARTRAY

Depuis plus de 10 ans, Biolojik Karaez a su s'imposer comme la véritable vitrine de l'écologie centre Bretonne. Dans une ambiance conviviale, l'association Kuzul Skoazell Diwan Karaez vous propose une immersion totale au milieu de produits issus de l'agriculture biologique (vin, alimentaire, cosmétique, bien être, artisans d'art locaux).

Organisation : Kuzul Skoazell Diwan Karaez.



2 €
GRATUIT POUR LES MOINS DE 12 ANS

SADORN 31 A VIZ HERE & SUL 1 A VIZ DU BIOLOJIK KARAEZ

10E00-7E00
SAL J. MARTRAY

Abae ouzhpenn 10 vloaz eo deuet Biolojik Karaez da vezañ al lec'h diskouez gwellañ eus an ekologiezh e Kreiz-Breizh. En un endro plijus e kinnig ar gevredigezh Kuzul Skoazell Diwan Karaez deoc'h soubañ da vat e-mesk produioù eus al labour-douar biologel (gwin ha boued).

Aozet gant : Kuzul Skoazell Diwan Karaez.

2 €
DIGOUST EVIT AR RE DINDAN 12 VLOAZ.

biolojik.karaez@gmail.com

JEUDI 5 NOVEMBRE

MÉTAMORPHONE

SINE QUA NON ART

10H00 & 14H15
AMPHI

DANSE, BEAT BOX & ARTS NUMÉRIQUES

Prenez un ballet mythique : *L'Après-midi d'un faune* de Nijinski. Scandale au Châtelet, entrée dans l'Histoire. Sautez un siècle maintenant, réunissez un danseur et un beatboxer et faites-les remixer le ballet avec les moyens de leur temps : voici MétamorPhone.

Au-delà du clin d'œil à Nijinski, ce duo vibrant pour une voix et un corps est un feu d'artifice, à la croisée des danses ancestrales et de la culture techno.

Tribalité, urbanité : deux réalités que tout oppose ? Pas si sûr dans ce spectacle en forme de grand mix, où les jeunes connectent immédiatement avec l'esthétique résolument urbaine de la danse électro, des créations graphiques et du beatbox, et où la voix se mue en instrument électronique. Dans un décor numérique en perpétuelle transformation, Brice Rouchet est fulgurant d'énergie, aux côtés de l'incroyable performeur vocal Tioneb. Dansez jeunesse !

Concept, chorégraphie : Christophe Béranger & Jonathan Pranlas-Descours

Danse : Brice Rouchet

Musique, beatbox, loop : Tioneb

Création Numérique, vidéo : Olivier Bauer

Dès 8 ans.

Durée : 45 min.

Partenariat Espace Glenmor, JM France.

Ce spectacle n'est pas inclus dans notre formule d'abonnement.



© sine qua non art

YAOU 5 A VIZ DU

MÉTAMORPHONE

SINE QUA NON ART

10E00 & 2E15
ANFI

DAÑS, BEAT BOX & ARZOÙ NIVEREL

Kemerit ur varrezh brudet : *L'Après-midi d'un faune* gant Nijinski. Skandal er Châtelet, chomet en istor. Kit d'ur c'hantved pelloc'h bremañ, lakait un dañser hag ur beatboxer asambles ha lakait anezho da sonveskañ ar varrezh en-dro gant binvioù o amzer : setu MétamorPhone.

En tu all d'an tammig dave da Nijinski ez eo an daouad birvidik-se evit ur vouezh hag ur c'horf un tan-arvest, e kroasent an dañsoù eus an amzer gozh hag ar sevenadur tekno. Chom en ur veuriad pe en ur gêr : daou dra a c'hall c'hoarvezout hag enebet dre ret ? N'eo ket ken sur se en arvest-se kinniget e stumm ur sonveskadenn vras, ma vez plijet ar re yaouank diouzhtu gant ar gened troet a-zevri gant an dañs elektro, ar c'hrouidigezhioù grafek hag ar beatbox, ha ma tro ar vouezh en ur benveg elektronek. En ur c'hinkladur niverel a vez o cheñch dibaouez, Brice Rouchet zo ur paotr leun a startijenn, e-kichen Tioneb, un den hag a oar c'hoari gant e vouezh. Dañsit, tud yaouank !

Meizad, korollouriezh : Christophe Béranger & Jonathan Pranlas-Descours

Dañs : Brice Rouchet

Sonerezh, beatbox, loop : Tioneb

Krouidigezh niverel, video : Olivier Bauer

Adalek 8 vloaz.

Pad : 45 min.

Kenlabour gant al Leurenn Glenmor, JM France.

N'emañ ket an arvest-se e-barzh hor formulenn goumanantiñ.

SÉANCES SCOLAIRES, SE RENSEIGNER AUPRÈS DE NOTRE SECRÉTARIAT

JEUDI 12 NOVEMBRE

J'(OHN) IMAGINE

CIE TRODIDRO

20H30
AMPHI

THÉÂTRE MUSICAL

Il y a bientôt quarante ans mourait John Lennon. Et si Imagine n'était pas juste une ritournelle mais une injonction ?

Deux personnages, que rien ne disposait à se rencontrer, vont être amenés à revisiter leurs choix professionnels et artistiques en se confrontant à l'œuvre et la vie de John Lennon. Le premier, sexagénaire au moment d'un important bilan de sa vie, plonge dans son passé de fan à la recherche d'éclaircissements. Le second, compositeur de chansons actuelles, retrouve soudain l'écho du questionnement de Lennon dans son propre tiraillement entre la commercialisation de sa musique et l'honnêteté artistique. Pour raconter cette histoire, le comédien Nigel Hollidge se fait chanteur et l'auteur/compositeur/interprète Alan Corbel n'hésite pas à devenir comédien, les chansons de John Lennon rencontreront les propres compositions d'Alan, et les figures légendaires de John, Paul et Yoko seront convoquées.

Conception et jeu : Alan Corbel & Nigel Hollidge
Collaboration artistique : Véronique Ros de la Grange, Nigel Hollidge
Scénographie et création lumières : Cyrille Guillochon
Création sonore : Emmanuel Six

Dès 14 ans.
Durée : 1h30.

TS : 5 € / TE : 8 € / TR : 13 € / TP : 15 € €

www.cietrodidro.fr



« SPECTACLE
OFFERT
AVEC VOTRE
ABONNEMENT »

« ABADENN
PROFET
GANT HO
KOUMANANT »

YAOU 12 A VIZ DU J'(OHN) IMAGINE KZH TRODIDRO

8E30
ANFI

C'HOARIVA SONEREZH

Daou-ugent vloaz zo e varve John Lennon. Ha ma ne vefe ket « Imagine » ur ribourtadenn nemetken, ur gourc'hemenn ne lavaromp ket ?

Daou zen, na oant ket graet evit kejañ an eil gant egile, zo o vont da adweladenniñ o dibaboù michere! hag arzel en ur geñveriañ ren o buhez ouzh oberenn ha buhez John Lennon. An hini kentañ, oadet a zek vloaz ha tri-ugent d'ar mare m'emañ oc'h ober ur bilañs a bouez eus e vuhez, a spluj en e amzer-dremenet pa oa fan evit sklaeraat e spered. An eil, saver kanaouennoù a vremañ, a gav a-daol-trumm an hekle eus prederioù Lennon pa veze sachet-disachet spered henezh etre kenwerzheladur e sonerezh hag an onestiz arzel. Evit kontañ an istor-se ez a ar c'homedian Nigel Hollidge da ganer hag ar saver kanaouennoù-sonaozer-kaner, Alan Corbell, ne chom ket etre daou soñj evit mont da gomedian. En em gavout a raio kanaouennoù John Lennon gant ar re savet gant Alan, hag an dud hollvrudet John, Paul ha Yoko, a vo pedet da zont.

Empennañ ha c'hoari : Alan Corbel & Nigel Hollidge
Kenlabour arzel : Véronique Ros de la Grange, Nigel Hollidge
Leurennaozañ ha krouiñ gouleier : Cyrille Guillochon
Son : Emmanuel Six

Adalek 14 vloaz.
Pad : 1e30.

TS : 5 € / PB : 8 € / PD : 13 € / PL : 15 €

VENDREDI 27 NOVEMBRE

ROCÍO MÁRQUEZ + DUO MENNTEAU - BARBEDETTE

20H30
AMPHI

CHANSON FLAMENCO, MUSIQUE DE TEMPÉRAMENT

Sa voix étourdissante en fait l'une des chanteuses de flamenco les plus convoitées. Une présence solaire qui épidémise le frisson. Rocío Márquez réussit l'incroyable tour de force de mettre tout le monde d'accord, des néophytes aux aficionados. Elle offre un flamenco dépouillé et sincère et expose toutes les facettes d'un art vocal au service des palos (formes et styles) les plus rythmiques et les plus orthodoxes. Dans cette époque du zapping, du jetable et des réseaux sociaux, Rocío Márquez propose un exercice de mémoire à travers « Visto en el Jueves » son 5ème album. Ecouter des mémoires vives et plurielles en utilisant, en découpant, en assemblant et finalement en remixant des chansons de la musique populaire qui ont un lien crucial au niveau personnel : avoir été déniché par Rocío dans l'historique marché aux puces « El jueves » de sa rue, la calle Feria de Séville.

Chant : Rocío Márquez
Guitare : Juan Antonio Suarez « Canito »

Retrouvez en première partie de soirée le chanteur Eric Menneteau et la harpiste Hoëla Barbedette (qui se sont rencontrés en 2005 au sein de la première formation de la Kreiz Breizh Akademi) qui jouent en duo depuis quelques années et proposent une interprétation singulière de chants soigneusement choisis dans la tradition orale bretonne, avec une couleur modale prononcée. Un travail créatif, exigeant, longuement mûri, d'un duo à la vitalité communicative...

Harpe micro-tonale : Hoëla Barbedette
Chant : Éric Menneteau

Durée : 1h30.
Coréalisation Espace Glenmor, Le Plancher.

18



© E. Lopez



© J. S. Lopez

19

GWENER 27 A VIZ DU ROCÍO MÁRQUEZ + DUO MENNTEAU - BARBEDETTE

8E30
AÑFI

KANAOUENNOÙ FLAMENCO, SONEREZHIOÙ A DEMZ

Gant he mouezh vezevellus ez eo unan eus ar c'hanerezed flamenco a vez c'hoantaet ar muiañ. Ur vezañs skedus hag a laka kridiennoù da redek a gorf da gorf. Biskoazh souezhusoc'h, dont a ra Rocío Márquez a-benn da lakaat an holl dud da sevel a-du an eil re gant ar re all, eus an dud nevez-deuet d'an dud arroutet. Kinnig a ra ur flamenco diglink ha gwirion ha lakaat a ra war wel holl zoareoù un arz mouezh e servij ar paloioù (stummoù ha stiloù) ar re lusket ar muiañ hag ar re reishañ. Er mare-mañ ma vez zapet kalz-kalz, ma vez implijet kalz ar pellgomzerioù hezoug hag ar rouedadoù sokial e kinnig Rocío Márquez lakaat an dud d'ober gant o memor dre « Visto en el Jueves », anv he fempvet albom. Selaou memorioù bev ha liesdoare e-ser implijout, e-ser didroc'hañ, hag evit echuiñ e-ser sonveskañ kanaouennoù pobl o deus ul liamm a bouez war an dachenn bersonel : bezañ bet diskoachet gant Rocío e marc'had an traoù kozh istorel « El jueves » en he straed, la calle Feria e Sevilla.

CKan : Rocío Márquez
Gitar : Juan Antonio Suarez « Canito »

Adkavit, el lodenn gentañ eus an nozvezh-se, ar c'haner Eric Menneteau hag an delennourez Hoëla Barbedette (o doa kejet an eil ouzh egile e 2005 e stummadur kentañ ar C'hreiz Breizh Akademi). C'hoari a reont daou-ha-daou abaoe un nebeud bloavezhioù ha kinnig a reont kanaouennoù dibabet en hengou dre gomz ar Vretoned, gant ul liv mozel kreñv. Ul labour krouiñ, a c'houlenn kalz, a gemer stumm e-pad pell, graet gant un daouad bev-buhezek a laka startijenn da dremen etre int hag an dud.

Telenn mikrotonek : Hoëla Barbedette
Kan : Éric Menneteau

Pad : 1e30.
Kensevenet gant al Leurenn Glenmor, ar Plañchod.

Da-geñver donedigezh Rocío Márquez e vo bannet gant ar gevredigezh Contrechamp ar film « Impulso », sevenet gant Emilio Belmonte, d'ar Gwener 27 a viz Du da 5e30 er sinema ar Gazeg C'hlas. En teulim-se eo bet savet poltrez Rocío Molina, dañsorez hep he far ha bugel terrupl ar flamenco modern.

TE : 8 € / TA : 13 € / TR : 15 € / TP : 18 €

Dans le cadre de la venue de Rocío Márquez, l'association Contrechamp programme le film « Impulso » réalisé par Emilio Belmonte, le vendredi 27 novembre à 17h30 au cinéma Le Grand Bleu. Ce documentaire dresse le portrait de Rocío Molina, danseuse hors norme et enfant terrible du flamenco moderne.

PB : 8 € / PK : 13 € / PD : 15 € / PL : 18 €

www.hoelabarbedette.eu
www.rociomarquez.net

JEUDI 10 DÉCEMBRE YOUP' LA BOUM SHARLUBËR

10H00 & 14H00
AMPHI

CHANSON JEUNE PUBLIC

Sharlubêr s'amuse avec ses guitares, cigar box, banjo, ukulélé, son sampleur (et sans reproche...), ses jouets musicaux et tutti quanti ! Dans la voix, les mots et les bruits de bouche, il y a des animaux qui parlent, de la pluie qui tombe avec les doigts, un orchestre qui ne s'emballe rien qu'avec la voix, un petit bonhomme de neige qui ne veut pas fondre, un poney qui trotte sur la langue, un petit vélo, une famille avec un papa qui habite sur le petit doigt, une maman qui s'habille en pansement... Les enfants écoutent, regardent, dansent, échangent et réagissent aux sons et aux chansons avec leur voix, leur corps. Les adultes peuvent s'y mettre eux aussi d'ailleurs !

Dès 3 ans.
Durée : 45 min.
Ce spectacle n'est pas inclus dans notre formule d'abonnement.

SÉANCES SCOLAIRES : SE RENSEIGNER
AUPRÈS DE NOTRE SECRÉTARIAT

SAMEDI 12 DÉCEMBRE ALL RIGHT ! CIE. LA MAIN S'AFFAIRE

16H00
AMPHI

CIRQUE, HUMOUR

Elle est tranquille et pleine de malice. Il est viril et bien décidé à donner le ton. Pourtant les rôles pourraient s'inverser... Qui domine qui, dans un duo de portés acrobatiques? Mariant la virtuosité technique et l'humour, la Cie. La Main s'affaire présente une création tonique et réjouissante. Burlesque sans tomber dans la caricature, cynique sans être cruel, interactif sans forcer le dialogue, All Right ! est un spectacle vertigineux entre cirque, technique et humour.

Dès 3 ans.
Durée : 50 min.
Ce spectacle n'est pas inclus dans notre formule d'abonnement.

TU : 8 €



www.zigotoprod.fr



YAOU 10 A VIZ KERZU YOUP' LA BOUM SHARLUBËR

10E00 & 2E00
AÑFI

KANAOUENNOÙ EVIT AR RE YAOUANK

C'hoariellat a ra Sharlubêr gant e c'hitaroù, e cigar box, e vanjo, e oukoulele hag e sampler, e c'hoarielloù sonerezh ha kement zo ! Er vouezh, er gerioù hag en trouzioù graet gant ar genoù ez eus loened o kaozeal, glav o kouezhañ gant ar bizied, ul laz-seniñ o tirollañ nemet gant ar vouezh, ur boulomig-erc'h na fell ket dezhañ teuziñ, ur pone a vez o trolat war an teod, ur marc'h-houarn bihan, ur familh gant un tadig a zo o chom war ar biz-bihan, ur vamm en em wisk gant lienadoù... Ar vugale a selaou, a sell, a zañs, a gaoze etrezo hag a ersav ouzh ar sonioù hag ouzh ar c'hanaouennoù gant o mouezh, o c'horf. Gallout a ra an dud deuet ivez stagañ ganti, a-hend-all !

Dalek 3 bloaz.
Pad : 45 min.
N'emañ ket an arvest-se e-barzh hor formulenn goumanantiñ.

ABADENNOÙ EVIT AR SKOLIDI,
GOULENN OUZH AR SEKRETOURIEZH

SADORN 12 A VIZ KERZU ALL RIGHT ! KZH LA MAIN S'AFFAIRE

4E00
AÑFI

SIRK, FENT

Sioul eo ha leun he sac'h a widre. Ur gour eo ha mennet-kaer eo da reiñ an ton. Ar rolloù a c'hallfe bezañ c'hoariet gant an eil pe egile koulskoude... Piv zo mestr war piv, en un daouad hag a ra dougadennou-ouesk ? Kinnig a ra ar gompagnunezh « La Main s'affaire », a vesk an ampartiz teknikel hag ar fent, ur groudigezh nerzhekaus ha plijadurus. « All Right », un abadenn fentus hep bezañ flemmus, kinek hep bezañ kriz, etreoberiat hep rediañ an dud da gaozeal, zo un arvest mezevellus etre ar sirk, an teknik hag ar fent.

Dalek 3 bloaz.
Pad : 50 min.
N'emañ ket an arvest-se e-barzh hor formulenn goumanantiñ.

PH : 8 €

DIMANCHE 13 DÉCEMBRE PANIQUE AU MINISTÈRE

PHILIPPE CHEVALLIER,
REBECCA HAMPTON, JULIE
ARNOLD, NINON DECHA,
MURIEL MICHAUX, NATHAN
NOYRET

17H00
AMPHI

THÉÂTRE

Pour fêter ses dix ans, la comédie culte de Jean Franco et Guillaume Mélanie, *Panique au ministère* fait peau neuve. Une toute nouvelle équipe d'actrices et d'acteurs, tous plus déjantés les uns que les autres, est fin prête à semer à son tour la panique au Ministère...

Gabrielle Bellecour, chef de cabinet du ministre de l'Éducation Nationale Louis Tesson, est à un carrefour de sa vie. Professionnellement, la récente nomination de Louis, qu'elle accompagne dans la vie politique depuis quinze ans, est une consécration. Mais elle commence à être lasse du rythme harassant qu'impose sa fonction... Familialement, elle est séparée depuis toujours du père de sa fille Sara, qu'elle a élevée seule. Mais Sara est à l'âge où l'on devient indépendant... Sentimentalement, c'est une catastrophe : effarouchée par des histoires douloureuses, elle n'a plus eu d'aventure depuis des années, au grand dam de sa mère, l'énergique (et croqueuse d'hommes) Cécile. Gabrielle étouffe...

L'apparition dans sa vie d'Éric, jeune homme de ménage du ministère, 25 ans à peine, va faire voler en éclats son petit monde.

Texte : Jean Franco et Guillaume Mélanie
Mise en scène : Guillaume Mélanie

Durée : 1h30.

TE : 20 € / TA : 25 € / TR : 27 € / TP : 30 €



SUL 13 A VIZ KERZU PANIQUE AU MINISTÈRE

PHILIPPE CHEVALLIER,
REBECCA HAMPTON, JULIE
ARNOLD, NINON DECHA,
MURIEL MICHAUX, NATHAN
NOYRET

5E00

AÑFI

C'HOARIVA

Evit lidañ he dek vloaz emañ *Panique au ministère*, ar gomeidienn hollvrudet bet skrivet gant Jean Franco ha Guillaume Mélanie, o cheñch neuz. Ur skipailh nevez a aktorezed hag a aktored, bepred dibolloc'h an eil re eget ar re all, zo prest-kaer, d'e dro, da lakaat spont er Ministerezh...

Gabrielle Bellecour, e penn kabined ministr an Deskadurezh-Stad Louis Tesson, zo e kroashent he buhez. Nevez zo eo bet anvet Louis, a vez skoazellet ganti er vuhez politikel pemzek vloaz zo. Un anaoudegezh eo eviti war dachenn al labour. Komañs a ra da vezañ faezh avat abalamour d'al lusk skuizhus lakaet warni gant he c'harg...

War dachenn ar familh, a-viskoazh eo dispartiet diouzh tad he merc'h Sara, a zo bet desavet ganti hec'h-unan. Met en oad emañ Sara ma teu ar vugale da vezañ dizalc'h... Un dismantr-traoù eviti war dachenn ar garantez : honnezh, spontet ganti an istorioù poanuis, n'he deus ket bet istorioù karantez abaoe bloavezhioù, siwazh d'he mamm, ur vaouez leun a startijenn anezhi (hag a blij dezhi paotreta), Cécile. N'emañ ket Gabrielle en he bleud...

Ha p'en em gav Éric en he buhez, ur paotr yaouank a gempenn ar ministrerezh, 25 bloaz a-boan, en he buhez, emañ o vont da lakaat he bedig da darzhañ.

Testenn : Jean Franco et Guillaume Mélanie
Leurenniñ : Guillaume Mélanie

Pad : 1e30.

PB : 20 € / PK : 25 € / PD : 27 € / PL : 30 €

À VENIR EN 2021

DA ZONT E 2021

SAMEDI 30 JANVIER

POHERMUZIK #10

14H00-21H30
ESPACE GLENMOR

LA MUSIQUE DANS TOUS SES ÉTATS

Dans une ambiance conviviale et festive, les professeurs et élèves musiciens de l'école de musique du Poher, et une formation issue des studios de répétition du CLAJ se produiront sur différentes scènes de l'Espace Glenmor. Découvrez des répertoires variés allant des musiques classiques aux musiques amplifiées, en passant par les musiques traditionnelles...

Coréalisation Espace Glenmor, École de musique du Poher, CLAJ.

GRATUIT

www.facebook.com/coledemusiquedupoher



SADORN 30 A VIZ GENVER

POHERMUZIK #10

2E00-9E30
LEURENN GLENMOR

AR SONEREZH EN E HOLL ZOAREOÙ

En un aergelc'h plijus ha festus e vo ar gelennerien hag ar skolidi sonerien eus Skol sonerezh ar Poc'hêr, hag ur strollad o tont eus studioioù pleustriñ an SDAY, o seniñ war meur a leurenn. Grit anaoudegezh gant tonioù liesseurt, eus ar sonerezh klasel d'ar sonerezh amplaet, en ur dremen dre ar sonerezh hengounel...

Kenaozet gant al Leurenn Glenmor, Skol sonerezh ar Poc'hêr, an SDAY

DIGOUST

VENDREDI 19 FÉVRIER

DUO DU BAS : LES GÉANTES + TALEC NOGUET QUARTET

20H30
AMPHI

CHANTS DE FEMMES D'ICI ET D'AILLEURS, MUSIQUES TRADITIONNELLES

Les géantes sont les héroïnes des chansons qu'Elsa Corre et Hélène Jacquelot ont écrites et composées. Leurs rencontres constituent ainsi le fil rouge du nouveau répertoire de Duo du Bas, tel un road-movie extravagant. Toujours très attachées à l'exploration musicale autour de leurs deux voix et des objets du quotidien qu'elles aiment détourner au profit du rythme et de la poésie, elles vous proposent un concert plein de surprises et de fantaisies ordinaires.

Ce quartet constitué autour de la chanteuse Rozenn Talec et de l'accordéoniste Yannig Noguét, réunit avec brio les atmosphères du fest-noz et du concert en mettant la singularité et la profondeur de la gwez au service de la transe de la gavotte. Les deux musiciens invités par le duo à partager cette expérience (Julien Padovani aux claviers, et Timothée Le Bour au saxophone) apportent au répertoire des couleurs plus contemporaines de jazz et de musiques improvisées. Ce quartet livre ainsi une musique vivante et énergique pour les pieds, mais aussi douce et délicate pour les oreilles !

Durée : 2h.
Coralisation Espace Glenmor, Le Plancher

TE : 8 € / TA : 10 € / TR : 13 € / TP : 15 €

<http://duodubas.jimdo.com>
www.rozennalec.bzh



© S. Pignatelli



© E. Lora

GWENER 19

A VIZ C'HWEVRERR DUO DU BAS : AR RAMZEZED + PEVARAD TALEG NOGUET

8E30
ANFI

KANAOUENNOÙ MERC'HED AC'HANN HAG A LEC'H ALL, SONEREZH HENGOUNEL

Ar ramzezed eo an harozezed a vez anv anezho er c'hanaouennoù a zo bet skrivet hag a zo bet lakaet sonerezh warno gant Elsa Korr ha Hélène Jacquelot. O c'hejadennoù eo linenn-stur ar c'hanaouennoù kanet gant Duo du Bas, evel ur road-movie foll. Tomm-tre int avat ouzh ar sonerezh ergerzhet en-dro d'o div vouezh ha da draoù ar vuhez pemdeziek a blij dezho diheñchañ evit al lusk hag ar varzhoniezh. Kinnig a reont deoc'h ur sonadeg leun a souezhadennoù hag a faltazioù ordinal.

Ar pevarad-se savet en-dro d'ar ganerez Rozenn Talec ha d'ar soner akordeoñs Yannig Noguét, a vod aergelc'hiou ar festoù-noz hag ar sonadegoù gant ampartiz en ur lakaat dibarder ha donded ar gwerzioù e servij birvidigezh ar gavotenn. An daou soner bet pedet gant an daouad da rannañ o skiant-prenet (Julien Padovani ouzh ar c'hlavieroù, ha Timothée Le Bour gant ar saksfon) a zegas d'ar c'hanaouennoù livioù nevesoc'h troet war-zu ar jazz hag an sonerezhioù primaozet. Kinnig a ra ar pevarad-se evel-se ur sonerezh bev ha nerzhus evit an treid, met ivez dous ha blizidik evit an divskouarn !

Pad : 2e.
Kensevenet gant al Leurren Glenmor, ar Plañchod

PB : 8 € / PK : 10 € / PD : 13 € / PL : 15 €

VENDREDI 19 MARS
MARC LAVOINE :
DANS LA PEAU

20H30
 AMPHI

CHANSON

Marc Lavoine revient à nous en toute intimité. Dans cette nouvelle tournée piano voix, l'artiste se livre plus que jamais. Accompagné par Alain Lanty, Marc Lavoine nous invite chez lui et nous fait découvrir les racines d'un monde empreint de poésie. Un monde dans lequel ses plus grandes chansons côtoient celles d'artistes qui lui sont chers. Les textes se révèlent alors sous un jour nouveau. Marc Lavoine écrit, chante, raconte, interprète des morceaux d'amour, des morceaux de vie, des morceaux de lui... et de nous.

TE : 30 € / TA : 35 € / TR : 37 € / TP : 40 €

www.marclavoine.fr



© 2014 Météo / B&B&D

GWENER 19 A VIZ
MEURZH
MARC LAVOINE :
DANS LA PEAU

8E30
 AÑFI

KANAOUENNOÙ

Emañ Marc Lavoine o tont en-dro davedomp etre tud nes. En droiad piano mouezh nevez-se e tigor e galon muioc'h eget biskoazh. Hor pediñ a ra Marc Lavoine, eilet gant Alain Lanty, da ober anaoudegezh gant gwrizioù ur bed merket gant ar varzhoniezh. Ur bed m'emañ e ganaouennoù meur e-kichen re arzourien eo tomm outo. En ur c'hiz nevez en em laka an testennoù war wel neuze. Skrivañ, kanañ, c'hoari a ra Marc Lavoine tammoù karantez, tammoù buhez, tammoù diwar e benn dezhañ... ha tammoù diwar hor penn deomp.

PB : 30 € / PK : 35 € / PD : 37 € / PL : 40 €

DIMANCHE 28 MARS

LEMMA

17H00
AMPHI

MUSICIENNES DE LA SAOURA (ALGÉRIE)

C'est à plus de 800 km au sud de la mer méditerranée, dans le désert algérien, au carrefour des routes caravanières de jadis, que se trouve la région de la Saoura d'où viennent les musiciennes du groupe LEMMA, l'ensemble créé sous l'impulsion de Souad Asla. La musique de la Saoura, qui s'abreuve à de multiples sources, est tantôt lente et langoureuse, tantôt vive et chaloupée et demeure reconnaissable par le dépouillement de ses instruments et la place qu'occupe le corps. La voix et les mains restent les principaux instruments, auxquels se joignent les percussions et le guembri ou la guitare de Hasna El Becharia.

Les 8 musiciennes de Lemma, se veulent les gardiennes d'une tradition séculaire, et s'en réclament jusque dans leur style vestimentaire. Elles brouillent les lignes du sacré et du profane, du genre et de l'espace. Elles empruntent aux musiques jadis apanage des hommes ; et jouent sur scène des musiques de chambre et de plein air. Publiciser l'intime, donner à voir ce qui était de l'ordre du non-visible, rompre la frontière du genre tout en glorifiant le féminin, autant de défis relevés par ces musiciennes ! Souad Asla a réussi à donner plus de visibilité à ce genre en alliant authenticité et exigence scénique. Désormais c'est en public et sur les scènes du monde qu'a lieu la lemma (réunion, assemblée), qui continue à se pratiquer encore en privé et dans l'intimité.

Production : Souad Asla / Tour'n'sol prod.
Direction artistique, percussions, danse, chant : Souad Asla
Chant, guembri, guitare, percussions : Hasna El Becharia
Chant, t'bal, bendir, karkabou : Aziza Tahri
Chant, bendir, karkabou : Fatima Abbi
Chant, bendir, karkabou : Khedidja Anebi
Chant, bendir, karkabou : Mebrouka Brik
Chant, t'bal, bendir, karkabou, pilon métallique : Rabia Boughazi
Chant, bendir, derbouka, karkabou : Sabrina Cheddad
Chant, t'bal, bendir, derbouka, tarija, karkabouMine : Zohra Kherabi

Durée : 1h30
Coréalisation Espace Glenmor, Le Plancher



© J Crawford

<http://tournsol.net>

D'autres spectacles
viendront compléter
cette programmation
en 2021 !

Retrouvez l'ensemble
des rendez-vous à venir
sur notre site internet :
www.glenmor.bzh

SUL 28 A VIZ MEURZH

LEMMA

5E00
AÑFI

SONEREZED EUS SAOURA (ALGERIA)

Ouzhpenn 800 km e su ar mor kreizdouar, e dezerzh Aljeria, e kroasht an hentoù karaouan a-wechall, emañ korn-bro Saoura. Alese e teu sonerezed ar strollad LEMMA, ar strollad krouet diwar atiz Souad Asla. Sonerezh Saoura, levezonet gant mammennoù a bep seurt, zo gwech gorrek ha langisus, gwech herrek ha lusket-kaer ha chom a ra aes da anavezout gant e binvioù hag al lec'h kemeret gant ar c'horf. Ar vouezh hag an daouarn a chom ar binvioù pennañ, eilet gant ar binvioù tos ha gant gembri pe gant gitar Hasna El Becharia. Fellout a ra da 8 sonerez Lemma bezañ mirourezed un hengoun kantvloaziek, hag a amc'houlont betek o doare d'en em wiskañ. Luziañ a reont linennoù ar sakr hag an disakr, ar genad hag an egor. Amprestañ a reont digant ar sonerezhioù a oa tra ar baotred gwechall ha c'hoari a reont sonerezh kambur ha sonerezh dindan an amzer war al leurenn. Lakaat ar vuhez personel war wel, reiñ da welet ar pezh na c'halled ket gwelet, terriñ harzoù ar genad en ur ganmeuliñ ar merc'hed, sed aze dalc'hoù da vezañ talet outo gant ar sonerezed-se ! Deuet eo Saouad Alsa a-benn da lakaat ar genad-se muioc'h war wel en ur veskañ an dilested hag ar redi war al leurenn. Bremañ ez eo dirak an dud ha war leurennoù ar bed e vez dalc'het al lemma (emvod, bodadenn), a gendalc'her da bleustriñ er vuhez personel hag er vuhez prevez c'hoazh.

Produet gant : Souad Asla / Tour'n'sol prod.
Renerezh arzel, binvioù tos, dañs, kan : Souad Asla
Kan, gembri, gitar, binvioù tos : Hasna El Becharia
Kan, t'bal, bendir, karkabou : Aziza Tahri
Kan, bendir, karkabou : Fatima Abbi
Kan, bendir, karkabou : Khedidja Anebi
Kan, bendir, karkabou : Mebrouka Brik
Kan, t'bal, bendir, karkabou, pilouer metal : Rabia Boughazi
Kan, bendir, derbouka, karkabou : Sabrina Cheddad
Kan, t'bal, bendir, derbouka, tarija, karkabouMine : Zohra Kherabi

Pad : 1e30
Kensevenet gant al Leurenn Glenmor, ar Plafchoù

DIMANCHE 4 OCTOBRE
BOURSE AUX VÊTEMENTS
& PUERICULTURE

AUTOMNE - HIVER
DE 10H00 À 16H00
GRATUIT
ORGANISATION : ÉCHANGES ET CIE.

MARDI 24 NOVEMBRE
CONFÉRENCE : 2020
75^{ÈME} ANNIVERSAIRE
DE LA LIBÉRATION DES CAMPS
DE CONCENTRATION NAZIS.
LE RETOUR À LA LIBERTÉ
DES DEPORTÉS

14H00
GRATUIT
ORGANISATION : UNIVERSITÉ
DU TEMPS LIBRE DU CENTRE - OUEST BRETAGNE

DU 28 NOVEMBRE
AU 13 DÉCEMBRE
EXPOSITION :
ÂMES DE BRETAGNE
LE TOUR

GRATUIT
ORGANISATION : ÂMES DE BRETAGNE
www.amesdebretagne.bzh

SUL 4 A VIZ HERE
FOAR AN DILHAD
& BABIGOÛ

DISKAR-AMZER - GOAÑV
EUS 10E00 DA 4E00
DIGOUST
AOZET GANT : ÉCHANGES ET CIE.

MEURZH 24 A VIZ DU
PREZEGENN : 2020 -
75^{VET} DEIZ-HA-BLOAZ
DIEUBIDIGEZH
AR C'HAMPOÛ-BAC'H NAZI.
DISTRO AN DUD DEPORTET
EN O FRANKIZ

2E00
DIGOUST
AOZET GANT : SKOL-VEUR AN AMZER VAK BRO
KORNÔG KREIZ BREIZH

EUS AN 28 A VIZ DU BETEK
AN 13 A VIZ KERZU
DISKQUEZADEG :
ENEÒÙ BREIZH
AN DRO

DIGOUST
AOZET GANT : ENEÒÙ BREIZH
www.amesdebretagne.bzh

CRÉATION ARTISTIQUE KROUIDIGEZH ARZEL

34


Parallèlement à la diffusion de spectacles, l'Espace Glenmor s'engage dans le soutien à la création artistique. En effet, présenter un spectacle à un public ne s'improvise pas, il doit se travailler, se mûrir. L'Espace Glenmor est ainsi mis à la disposition d'artistes dans le cadre de résidences de quelques jours à plusieurs semaines. Ce temps indispensable, permet aux compagnies de s'installer, de chercher, d'essayer, d'expérimenter, de vérifier, de se confronter, d'oser...

Ouzhpenn diskouez arvestoù e ra al Leurenn Glenmor war-dro skoazellañ ar c'hrouñ arzel. Rak kinnig un arvest dirak an dud ne vez ket graet war ar prim, ret eo labourat ha peurlipat an traoù. Gant se e c'hall an arzourien dont da chom un toullad devezhioù pe sizhunvezhioù el Leurenn Glenmor evit prientiñ ur grouidigezh. Pa vez lezet amzer e-giz-se gant ar c'hompagnunezhioù e c'hallont bezañ en o aez, klask doareoù nevez, amprouiñ o dibaboù, ober eskemmoù, krediñ mont gant hentoù nevez...



ACTION CULTURELLE OBEREREZH SEVENADUREL

35



Au cours de la saison culturelle, des rencontres régulières seront organisées parallèlement aux représentations (ateliers de pratiques artistiques, répétitions publiques, programmation de spectacles « hors les murs », visites de l'Espace Glenmor...).

E-kerzh ar c'houlzad sevenadurel e vo aozet emgavioù ingal e-kichen an arvestoù (atelieroù pleustriñ an arzoù, pleustradegoù digor d'an dud, abadennoù « en diavaez », gweladenniñ al leurenn Glenmor...).

S'ABONNER KOUANANTIÑ

L'abonnement est gratuit et nominatif. Il vous suffit de choisir 3 spectacles au minimum dans le formulaire ci-joint. Vous pouvez compléter votre abonnement en cours de saison tout en bénéficiant du tarif abonné.

Digoust eo ar c'houmanant ha war anv un den hepken. Trawalc'h eo deoc'h dibab 3 abadenn da nebeutañ er furmskrid amañ kevret. Gallout a rit klokaat ho koumanant ivez e-kerzh ar c'houlzad ha kaout priz ar goumananterien.

LES AVANTAGES :

- Des réductions de tarifs sur les spectacles
- Place numérotée et réservée
- Couloir d'accès spécial abonnés qui évite la file d'attente (arriver 15 min avant le spectacle)
- Abonnement à la newsletter

AR GOUNID :

- Distaolioù prizioù evit an holl abadennoù
- Plas niverennet ha miret en añfiteatr
- Trepas tremen a-ratozh evit ar goumananterien, ar pezh a dalvez n'o devez ket da c'hortoz er steudad (en em gavout 15 min a-raok an abadenn)
- Koumanant d'al lizher-kelaouiñ

FORMULAIRE D'ABONNEMENT FURMSKRID KOUMANANTIN

NOM / ANV.....

PRÉNOM / ANV-BIHAN

ADRESSE / CHOMLEC'H

CODE POSTAL & VILLE / KOD POST & KÊR:

MEL / POSTEL:@.....

TÉL / PGZ:

DATE DEIZIAD	SPECTACLE ABADENN	TARIF ABONNÉ PRIZ KOUMANANTERIE	PLEIN TARIF PRIZ LEUN	NOMBRE DE PLACES NIVER A BLASOÙ	TOTAL SAMMAD
02/10/20	ENSEMBLE MATHEUS	15 €	20 €		
16/10/20	GARDEL Y YO, UNE VIE DE TANGO	8 €	12 €		
12/11/20	J'(OHN) IMAGINE			SPECTACLE OFFERT	
27/11/20	ROCÍO MÀRQUEZ + MENNETEAU BARBEDETTE	13 €	18 €		
13/12/20	PANIQUE AU MINISTÈRE	25 €	30 €		
19/02/21	LES GÉANTES + TALEC NOGUET QUARTET	10 €	15 €		
19/03/21	MARC LAVOINE	35 €	40 €		
28/03/21	LEMMA	15 €	20 €		

BULLETIN À RENVOYER ACCOMPAGNÉ DE VOTRE RÉGLEMENT ET D'UNE ENVELOPPE TIMBRÉE LIBELLÉE À VOTRE ADRESSE À :

ESPACE GLENMOR
RUE JEAN MONNET
KERAMPULH
29270 CARHAIX

PAPERENN DA GAS GANT HO PAEAMANT HAG UR GOLO-LIZHER SKRIVET HO CHOMLEC'H WARNAN DA :

LEURENN GLENMOR
STRAED JEAN MONNET
KERAMPULH
29270 KARAEZ

ABRÉVIATIONS UTILISÉES :

TP : Tarif plein
TR : Tarif réduit
TE : Tarif enfant (de 7 à 12 ans)
TA : Tarif abonné
TU : Tarif unique
TS : Tarif scolaire
 Les tarifs mentionnés n'incluent pas les frais de location appliqués lors de l'achat de places sur les réseaux de vente extérieurs (France Billet, Ticketmaster, See Tickets)

TARIF RÉDUIT

Le tarif réduit est accordé sur présentation d'un justificatif aux : demandeurs d'emploi, allocataires du RSA, de l'AAH (adultes handicapés), étudiants, moins de 18 ans, adhérents CLAJ, élèves et professeurs de l'école de musique du Poher et des écoles de musique du Pays COB, intermittents, groupes à partir de 10 personnes, membres des comités d'entreprises partenaires, détenteurs du pass loisirs de Poher Communauté, adhérents La Grande Boutique / Le Plancher pour les spectacles coréalisés.

NOS PARTENAIRES CULTURELS

De nombreuses propositions de spectacles ou d'actions culturelles sont présentées en partenariat avec d'autres acteurs du territoire. Nous les remercions de leur implication et de la qualité de leur collaboration.

- CLAJ : Culture Loisirs Animation Jeunesse en Poher.
- École de musique du Poher.
- Médiathèque de la ville de Carhaix.
- Les Vieilles Charrues.
- Le Plancher, scène du Kreiz Breizh.
- Jeunesses Musicales de France.



SONT ÉGALEMENT PARTENAIRES DE LA SAISON CULTURELLE :

Ville de Carhaix, Échanges & Cie, Bagad Karaez, Centre culturel breton Egin, Kuzul Skoazell Diwan Karaez, Association Contrechamp, Ipsiti Production, Tro Karaez, association Galipette, RAM du Poher, lycée Paul Sérusier, lycée Diwan, collège Beg Avel, collège St Trémur, écoles primaires et maternelles de la commune de Carhaix, Institut Médico Éducatif, Office public de la langue bretonne.

L'Espace Glenmor adhère au réseau Culture Zâtous Bretagne (www.culture-zatous.com), au réseau Bretagne En Scène(s), et au réseau Chainon.

INFORMATIONS PRATIQUES

Espace Glenmor - rue Jean Monnet - Kerampuilh - 29270 Carhaix
 Tél: 02 98 99 37 50 - courriel: contact@glenmor.bzh
 Site internet: www.glenmor.bzh - facebook: www.facebook.com/espace.glenmor
 n°Licences R205812, R205718, R205719

HEURES D'OUVERTURE :

L'accueil de l'Espace Glenmor est ouvert du lundi au vendredi de 9h à 12h et de 14h à 17h30. L'équipe de l'Espace Glenmor remercie l'ensemble des bénévoles qui s'impliquent à ses côtés tout au long de l'année.

Photo de couverture: Fotolia
 Conception graphique: MetaGrafic - Carhaix

BERRADURIOÙ IMPLIJET :

PL : Priz leun
PD : Priz digresket
PB : Priz bugale (eus 7 da 12 vloaz)
PK : Priz koumananterien
PH : Priz hepken
TS : Pris skolidi
 E-barzh ar prizioù meneget n'emañ ket ar mizoù feurmñ lakaet da dalvezout pa vez prenet plasoù er rouedadoù gwerzhañ diavaez (France Billet, Ticketmaster, See Tickets)

PRIZIOÙ DIGRESKET

Un distaal a vez graet d'ar re a ziskouez ur broenn ez int : klas-kerien labour, tud a zegemer KKO* pe SON**, studierien, tud yaouank dindan 18 vloaz, izili an SDAY, skolidi ha kelennerien skol sonerezh ar Poc'hêr ha skolioù sonerezh Bro Kornôg Kreiz Breizh, astalerien, strolladoù ouzhpenn 10 den, izili ar poellgorioù embregerezh kevelerien, tud a zo ganto pass dudi Poc'hêr kumuniez, izili « ar Stal Vras » / « Ar Plañchod » evit an abadennoù kensevenet ganto.

HOR C'HEVELERIEEN SEVENADUREL

E-leizh a abadennoù pe obererezhioù sevenadurel a vez kinniget e kenlabour gant obererien all eus ar vro. Trugarekaat a reomp anezho evit ar perzh a gemeront hag evit kalite o c'henlabour.

- SDAY : Sevenadur Dudi Abadennoù Yaouankiz ar Poc'hêr
- Skol sonerezh ar Poc'hêr.
- Mediaoueg kêr Garaez.
- An Erer Kozh
- Ar Plañchod, Leurenn Kreiz-Breizh.
- Yaouankizoù sonerezh Frañs.

LEC'HIÒÙ GWERZHAÑ

LEURENN GLENMOR

Eus al Lun d'ar Gwener eus 9e da 12e hag eus eus 2e da 5e30
 1 eur a-raok an abadennoù (gant ma chomo plasoù) en deizioù ma vez abadennoù.

DRE LIZHER

Merkit anv an abadenn, an niver a blasoù hag ar rummoù prizioù. Kasit ho paeamant d'al Leurenn Glenmor (chekenn war anv al Leurenn Glenmor), gant ur golo-lizher timbret gant ho chomlec'h warnañ ha gant ur broenn evit kaout un distaal, diouzh an dro.

LEC'HIÒÙ GWERZHAÑ ALL

- KARAEZ
 Rann sevenadurel Leclerc (rouedad Ticketmaster)
- GOURIN
 Stal Leclerc (rouedad Ticketmaster)
- E FRANÑS A-BEZH
 Rouedadoù See Tickets, Francebillet ha Ticketmaster (Fnac, Carrefour, Géant, Auchan, C. Leclerc, Cora).

BILHEDEREZH ENLINENN !

Gallout a rit prenañ ho plasoù abadennoù dre ar Genrouedad ha moullañ anezho war-eeun er gêr. Emgav en hol lec'hienn!
 (www.glenmor.bzh)

MAT DA C'HOUZOUT

Digoret e vez dorioù ar sal 20 munit a-raok an abadenn. Azezañ a reer lec'h ma karer (nemet ar goumananterien).

An holl dud (bugale pe oadourien) a zeu da welet un abadenn a rank diskouez ur bilhed pa'z eont e-barzh ar sal.



TITOUROÙ PLEUSTREK

Leurenn Glenmor - straed Jean Monnet - Kerampuilh - 29270 Karaez
 Pgz: 02 98 99 37 50 - postel: contact@glenmor.bzh
 Lec'hienn Genrouedad: www.glenmor.bzh - facebook: www.facebook.com/espace.glenmor
 Aotreoù niv. R205812, R205718, R205719

EURIOÙ DIGERIN :

Digor e vez degemerva al Leurenn Glenmor eus al Lun d'ar Gwener eus 9e da 12e hag 2e da 5e30. Trugarekaat a ra al Leurenn Glenmor an holl dud a-youl vat a genlabour ganti a-hed ar bloaz.

Luc'hskeudenn ar golo: Fotolia
 Empennañ grafek: MetaGrafic - Carhaix



ESPACE
LEURENN

**GLEN
MOR**

CONTACT@GLENMOR.BZH

02 98 99 37 50

WWW.GLENMOR.BZH



COREFF



Crédit Mutuel Arkéa



centre national
de la chanson des
variétés et du jazz